

# RIMOU

HA

## GOULENNOU

*EVIT AN EUREUJOU.*



E MONTROULEZ,

E ty LÉDAN, Impr., e traon ru ar Vur.

БОНЕ

ГОУЛДИНОЕ



БИБЛИОТЕКА

ГОСУДАРСТВЕННАЯ БИБЛИОТЕКА СССР

# RIMOU, DISCOURSIOU HA GOULENNOU EVIT AN EUREUJOU.

*'Dicours pa zér da bedi da eun Eured.'*

**S**ALUD dêc'h oll, compagnuez,  
Dre ar zalud e commandan va devez.  
Me a zo deut da doull ho tor  
Gant calz a joa hac a enor :  
Antreet joaüs en ho ty  
Gant eur c'hoant vrás d'ho saludi.

Da Zoue e rentan ar zalud humblamant ;  
Ha goude me ray va c'homplimant.

Piou eus an ty-màn a bedin-me da guenta ?  
Pedi a rân ar mestrou ha qement zo ennâ :  
Mar deus domestiqtet en ho ty,  
En o fedan ivè qercoulz ha c'houi ;  
Rac re a labour am be-me  
O pedi an eil goude eguile  
Da zonet hep faut da eur Banquet  
A vezo evidomp preparet  
Gant *Mari Lipiq ha Yan Baron*,  
Pere ho ped ganemp-ni a greiz calon :  
Fixet eo an devez da Zemeurs qenta ;  
Rac-se, mar plich ganêc'h, deut oll da asista.  
Eu *Plouyan* vo an Eured hac en ty *Flampez ar Banquet* :  
Mar plich ganêc'h en em gafet hac e vîmp contant reutet.

Me ya da gonta dêc'h eur veach :  
Dont a reot da... da quomes ar plac'h.



Hac a vo grêt en form eun ty ,  
Evit respont d'an dremenedi.  
Ha c'houi ive , va mignon qèz ,  
Mar oc'h eus marc'hadourez  
Pe da brena , pe da voerza ,  
Partiit buan gante da guenta ;  
Evit Montroulez pə Gastel ,  
Hac e profitot ne vo qet pell ;  
Eno e cafot honestament  
Peadra evit hoc'h arc'hant.  
Eur garante evel honnes  
Ne all qet finissa james.  
Credi a ràn hoc'h eus pedet  
Jesus hac e Vam beniguet  
Da asista en hoc'h eured.  
Demp-ni bremàn , compagnuez ,  
Da offr hor peden assambles  
Er sacrific an oferen ,  
Da c'houlen grâcou souveren ;  
Hac evidomp hac evite ,  
Gouleñnomp grâcou ouz Doue.  
Erfin , o tont da finissa :  
Dalit he dorn , croquit ennâ ;  
Promettit dezi fidelite ,  
Hac hi a brometto dêc'h ive.  
Cetu aze he dorn deo  
Doue dre e c'hraç d'ho cunduo.

FIN.



Propriété.



## DEVERIOU AN DAOU BRIED

AN EIL EN ANDRET EGUILÉ.

---

(Chabistr 6 eus ar C'hod Civil.)

An Daou Bried a dle chom fidel an eil d'eguile hac en em zicour an eil eguile.

An ozac'h a dle difen e vreg, hac ar vreg senti ouz he ozac'h.

Oblijet eo ar vreg da ober he demeuranç gant he ozac'h ha d'e heulia en qement lec'h ma caro chom.

An ozac'h a zo oblijet d'he diguemeret en e dy ha da fournissa dezi qement tra a zo ret da gaout evit beva hac en em wisqa, hervez e c'haloud hac e stat.

---

Cetu aze ho teveriou :  
Dalc'hit mad dê da bep heurion  
Mar bezit fidel entrezoc'h,  
Ar Barados a c'honezoc'h.



